



LANVELLEC, noc'h quel ar vro nac an  
douar reputet, enoc'h eman ar Fleuren  
divin mistiguet a delc'h en pevoar c'horn  
ar bed, ar hoës a silvoudigues, Gloria  
Mater Dei.

Voar un ton coveoab.

**M**ARI, c'houi eo ar saëra deus ar grouadurien,  
Immanç eo ho pouerio dirac ar Souveren;  
O invoquin ho hano, Guerc'hes mam drueus,  
E c'hopten an oll graço digant ho map Jesus.



Ho imag, en mil andret en bro ar Franchichen,  
A sclairey evel leternio dirac on Souveren;  
C'houi eo an titr assuret, alhoue misterius,  
Da digueri an tensor a verito Jesus.



Demp gant guir devotion da chapel Sant Carre;  
Meditomp ar retablen, Mari leun a druce,  
Douguen a ra ar mister deus on redamtion,  
Jesus maro evid'omp da bea on rançon.



Indign on corf a speret da dont da supplicia  
Ho true, ho madeles, ho grandeur ac o c'hloar;  
Me neur voel ar c'houpapla deus ho oll vugale,  
Ac a esper ar pardon dray oc'h, mam a drue.

Na lesin quet en secret miraclo admirabl,  
 C'hoant a meus da c'honsoli bugales, mam a tad,  
 Na deui den d'en eum livra james dan desesper,  
 P'en deus da advocades Mari mam d'on Salver.



Eur buguel mal daouzec vlas, a barous Larvellec,  
 Dre eur cant a indesanç a so bed didaeodet,  
 Rentet mut ac incapabl da allout isplia  
 Penos a voa arretet ar maleur-se gant-an.



Pa didostes an amzer quent pasq ar vugale,  
 E rai certen seblancho en devoa bolonte:  
 Ar belec a lar dean: ne allan quet ma mab  
 Rai dec'h ar gommunion pa na ellet coestad.



A ben eun eubeat goude e crogas en dorn e vam  
 Gant eun air quen trueus gant aon raccaet blam;  
 Ober a ra seblancho caet c'hoant da fedi,  
 Doue en deus-i inspiret da sont emez an ty.



Pa voa en creis ar blassen e vrec'h a ustenai;  
 C'hoant a heus-te, e may, e c'haffemp da S. Carre?  
 Ac en o soubla e ben o comanç pen an hent  
 Evcut mont da invoqui Rouannes an oll Sent.



Pa ari en tal ar chapel eo en um brosternet  
 Dirac an hor principal, vis-a vis d'ar porhet,  
 Da supplia ar Voerc'hes da exposi d'e map  
 An oll extremito deus e stat pitoyabl.

Ober à ra tro'r verret gant guir devotion,  
 Santout a ra um douster, eur joa en e galon,  
 Eur tomder en e c'heno ac e daeot e cresqui,  
 Meulomp oll guir vap Doue ac ar Voerc'hes Vari.



Pa n'eus achuet e dro ai en eum arretet  
 Da achui e beden elec'h ma voa commanctet,  
 Da suplia ar Voerc'hes, dre eur reconnessanç,  
 Da drugarecat Jesus demeus e brovidanç.



Pa finissas e beden e savas en e za:  
 Sellet ma mam deus ma zeot breman e cogan;  
 Demp da ober ar rapport d'ar belec deservant  
 E meus digant ma c'hrouer recevet eur present.



Eur plac'hic tri bla voa aget, merc'h da Evoan Tronio,  
 Coet en dour ar velin, sclapet voar ar rojo;  
 E mam a deussi goested da chapel Sant Carre,  
 Caer eo ar bet alec perseverant en bue.



Eur plac'hall a Blouaret, merc'h da Louis Prigeant,  
 O tremen milin hevoegan a so coet er stang;  
 Tremen diou eurvoes amzer a eo bet dindan en dour,  
 Goested a eo bet ar Voerc'hes ac e teu de sicour.



Eur buguel pevoarsec mis, map da Ian ar Guergoar,  
 Demeus a dremel Plestin, sellauet ar miracl,  
 Ar Vagueres a sorti soigni e loenet  
 Ac a lez ar c'hrouadur cousquet voar an oalet.

(4)

Centralie a loeret a daleas ar vrog,  
Pa jonge en e buguel e voa ambarasset:  
Itron Varia drue, en chapel Sant Carre  
C'hout eo souten ar mamo en soigno bugale.



Pa digoras dor e zi, peb eus eun epouvantet  
O voelet eur vogueden gant eur hees etouffant:  
Pa sellas eus ar buguel, e voa daevoet e dorchen  
Ac e zillat en antier a rostet e groc'hen.



Ar Vagueres affliget a sortias ractal  
Da glasq an amesayen, eman eo ar glahar;  
Pa int arriet da voelet un tan a voa mouguet,  
Ar buguel o lifroncal ac en manet cousquet.



Re hir ven o recita un nombr a viraclo  
Met a re so arriet a nevoe amser so:  
Demp gant guir devotion da chapel Sant Carre,  
Eno eman ur c'hranal deus ar c'hasso Doue.



Ar grasso particulier a beurs ar Voerc'hes sacr  
A ra d'an oll bobl fidel dont de zrugarecat;  
Mes ar grasso special a so universel,  
Rac dre e phrotection e teu fin d'ar bresel.

FIN.